


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	8
	Kelaouennoù	18
	Notennoù	23

Herve LATIMIER

**L'économie du réel
face aux modèles
trompeurs,**
gant David Cayla,
Deboeck, 2018,
158 pajenn, 18€



Studiañ a ra David Cayla istor ar preder a-zivout an ekonomiezh. Santout a reer sell an istorour er mennozhioù displeget el levr. Dreist-holl en eil chabistr, *Economie du réel*. Ur ger digeriñ, pevar chabistr hag ur c’hlozadur a ra danvez an oberenn. Kavout a reer ul levrlennadur ha roll an anvioù meneget ivez.

Dielfennañ a ra meizad ar marc’had hag an efedoù plus-

trek degaset gant ar politikerezhioù awenet gant e azeulerien. Diskouez a ra pegen diboell eo ar “skiant” ekonomikel a-vremañ diazezet war traoù diwir evel ar “bevezer poellek”, “ar c’hevezerezh pur ha parfed” ha “lezenn ar c’hinnig hag ar goulenn”. N’hell ar skiant-se displegañ tost netra eus ar pezh a c’hoarvez er bed gwirion na sent ket eus he zeoriennoù, anat...

Sklaer eo titloù ar chabistròù : *Le marché, cet inconnu ; Le mythe du marché ; Le marché néoclassique et ses limites ; La société de marché*. Maget eo ar chabistr kentañ gant un dielfennadur dedennus-kenañ eus ar pezh a c'hoarvez e bed al labour-douar. En eil e kaver ur sell war istor ar preder war an ekonomiezh hag ur burutelladur eus ar meizadoù pennañ. Memes spered a gaver en trede met troet war ar bed a-vremañ. Ar pevare a bled gant an darempredoù etre marc'had ha kevredigezh. Dañjerus-kenañ eo ober eus ar marc'had ar wikefre a zlefe ren an darempredoù etre an dud war tost pep tachenn. Echuiñ a ra ar chabistr gant ur rann a ro danvez preder : « *Le marché détruit-il la société ?* ». Nec'hus eo ar c'hlozadur. En arvar emañ an demokratiezh hervez an aozer abalamour d'an troc'h brasoc'h-brasañ etre lodenn uhelañ ar gevredigezh (etre 30 ha 40% eus ar boblañs) hag ar peurrest eus an dud. Empennañ a ra un emglev etre ar frankizourien war dachenn an ekonomiezh hag ar boblelourien evit sevel sistemoù frankizour mik e-keñver ekonomiezh, gwasker ha kilstourmer war an

tachennoù all (urzh, frankizoù e-keñver mennozhioù). Siwazh pa seller ouzh Bro-Sina e weler ne zegas ket ar frankizouriezh ekonomikel un demokratiezh wirion ha pa weler pezh a dremen en Ungaria, Turkia, Italia, Brazil... e c'heller soñjal emañ ar gwir gantañ siwazh. Mankout a ra skrid David Cayla a arlivoù alies a-walc'h met reiñ a ra d'e lennerienn peadra da vagañ o freder.

**Les langues minoritaires :
une différenciation
positive dans le
monde de l'économie,
Le cas de la langue
bretonne,
gant Denez Pichon,
TIR, 2017,
366 pajenn, 25€**



Lennet eo bet gant hor c'houmananterien pennad Denez Pichon e niverenn 421 *Al Liamm* (Meurzh-Ebrel 2017) : *Studiadenn war normalizadur ar yezhoù minorel e bed an armerzh* (pp.68-75) diwar-benn an dezenn en deus difennet e miz Kerzu 2016 e Skol-veur Roazhon 2. Droch vefe lavarout falloc'h egetañ ar pezh a skriv diwar-benn e dezenn hag he zeir lodenn : *Penaos eo deut ar brezhoneg betek ennomp* ; *Penaos eo bet implijet ar brezhoneg a-hed an amzer* [e bed an armerzh] ; *An elfennoù evit ober an hent* [evit reiñ e blas d'ar brezhoneg en un embregerezh]. Aes eo keñveriañ al levr hag ar pennad : kalz muioc'h a zisplegadennoù a gaver en dezenn evel-just. Disoc'hoù enklaskoù, hag ur bern skeudennoù dedennus-

kenañ na gaver ket er pennad, ivez. An div lodenn gentañ a zo kentoc'h istorel, an drede war an doare pleustrek da reiñ plas d'ar brezhoneg en un embregerezh skoueraet gant *Askorn Medical*. Daoust ma n'em eus ket desket kalz tra el lodenn gentañ e kavan he deus he flas el levr evit lec'hiañ an traoù ha titouriñ al lennerien n'anavezont ket istor hon yezh. Dedennus-kaer eo an eil lodenn. Kalz titouroù ha skeudennoù kentelius. An drede a zo pleustrek ha marteze un tamm diaesoc'h evit ul lenner ordinal. En diavaez eus ar sell resis war taol-arnod *Askorn Medical*, em eus kavet leun a furnez an evezhiadennoù graet war labour *Produet e Breizh* hag *Ofis Publik ar Brezhoneg* diwar-benn liveoù *Ya d'ar brezhoneg* peurgetket. N'in ket betek lâret e lenner al levr evel ur romant.

Chom a ra un dezenn kempennet evit an embann (notennoù, daveoù, displegadennoù spis,

taolennoù...) met lenn a reer anezhañ aes a-walc'h.

Les années 68 en Bretagne, Les mutations d'une société (1962-1981),
gant Christian Bougeard,
Presses Universitaires
de Rennes, 2017,
304 fajenn, 39€



Ul labour a-bouez eo levr Christian Bougeard abalamour d'an dielfennadur ha d'an titouroù niverus ha resis a gaver ennañ hag abalamour d'an niver bamus a skeudennoù a ziskouez en un doare fetis buhez an dud ha darvoudoù ar mare. Ul levr-kaer eo eta ouzhpenn bezañ kentelius. Adalek an titl e verzer tri zra. Evit an istorour n'eo "Mae 68" nemet ul lodenn verr eus ur prantad hir a gemmoù hag a stourmoù. Breizh istorel eo tachenn ar studiadenn ha stourmoù a bep seurt zo bet kaset war-raok eno, pell diouzh Pariz hag alies abretoc'h eget re Bariz. N'eus ket tu da zistagañ stourmoù ar bloavezhioù-se eus ar c'hemmoù divent a c'hoarvezas er gevredigezh vreizhat

en o c'herzh.

Eizh chabistr a ya d'ober an oberenn eus taolenn Vreizh er bloavezhioù 1960 betek pleg ar bloavezh 1981 : ar stourmoù sokial a ziwan adalek ar bloavezhioù 60, o c'hresk etre Even 1967 hag an 8 a viz Mae 1968 ; Mae 68 hag e astennoù ; ren Valéry Giscard d'Estaing hag enkadenn ekonomikel ar bloavezhioù 70. Reizh eo e vefe roet kalz a blas d'an dilennadegoù, da gemmoù politikel ar vro ha da vuhez ar strolladoù politikel a bep seurt. Ken reizh all eo e vefe gwelet dre ar munut ar stourmoù sokial ha roll ar sindikadoù koulz e-touez ar vicherourien hag al labourerien-douar. Hep ankouaat ar stourmoù ekologel el lodenn ziwezhañ. Titouroù ha

dielloù e-leizh a gaver war an tachennoù-se (traktoù, skritelloù, pajennoù kentañ kelaouennoù, skeudennoù talvoudus). Pouezus-tre eo lec'hiañ an holl draoù-se e kemmoù bras ha herrek ar gevredigezh. Dedenet bras on bet ouzhpenn ha ne vin ket ma-unan moarvat, gant ar plas roet d'an arzourien vreizhat (kanerien dreist-holl), da strolladoù evel UDB ha da daolioù an FLB. Dedennet on bet ivez gant an titouroù resis a-zivout skourroù liesseurt an tu-kleiz pellañ e Breizh. Tud zo a gavo o deus an danveziou-se re a blas marteze. N'emaon ket en o-zouez. Meur a-wech e veneg Christian Bougeard ar fed e weler ar Gwenn-ha-Du, deuet

L'illusion nucléaire, La face cachée de la bombe atomique,
gant Paul Quilès, Jean-Marie Collin ha Michel Drain,
Editions Charles Léopold Mayer, 2018,
174 pajenn, 20€

N'em eus ket soñj bezañ bet biskoazh a-du gant ar vombezenn atomek (na gant re all). Pa 'm eus gwelet ur pennad en *Télégramme* diwar-benn *L'illusion nucléaire*, em eus

da vezañ banniel ar Vretoned, e manifestadegoù a bep seurt adalek ar mare-se. Un draig marteze met arouezius eus ur c'hemm er gevredigezh hag e emzalc'h ar Vretoned e-keñver o identelezh.

Reizh eo ma ne vezer ket bepred ali gant an doare da zisplegañ an traoù rak ar c'houn n'eo ket an istor. Ul labour istorour eo *Les années 68 en Bretagne*, savet hervez hentennoù ar vicher. Danvez eskemm zo evel-se...

Un oberenn a dalvoudegezh eta. Pinvidik dre an titouroù liesseurt hag ar skeudennoù prizius. Da vezañ lennet hag implijet.



divizet diouzhtu lenn al lev. N'eo ket evit bezañ kendrec'het peogwir e oan dija, met evit kavout arguzennoù kreñv ha poellek degaset gant tud a anavez mat an danvez. N'on ket

bet dipitet. Un digoradur, daou chabistr warn-ugent renket e teir lodenn, ur c'hlozadur, un toullad stagadennoù, hag ul levr-lennadur. Ar ger “chabistr” a zo un tamm touellus rak pennadoù berr int. Seurt fichennoù. Pep hini war un danvez resis, savet en un doare sklaer ha pedagogel gant dielfennadurioù diazezet war fedoù. Titloù an teir rann a ziskouez mat ar pezh a gaver enno : *Les fausses certitudes* ; *Les omissions* ; *Les sous-estimations*.

El lodenn gentañ e weler e kredomp pe hon eus kredet un toullad traoù hag a zo faos pe darn anezho. Unan eus an traoù pouezusañ eo e vez diskouezet ne servij an arm-se da netra. Ne glot ket gant an dañjerioù a-vremañ hag an “dialierezh” n’eo nemet ur vojenn. Strategiezh ar grug : distrujet eur met flemmañ a reer ur wech diwezhañ... Pe DMA evit *Destruction Mutuelle Assurée*. Rak dañjerus-kenañ eo... En eil lodenn e kaver darvoudoù chomet damguzh alies o tiskouez ez eus bet kalz gwallzarvoudoù spontus hag ez eo tremenet ar bed hebiou d’ur brezel nukleel a-drugarez d’un doare taol-chañs meur a-wech. Diskouez a ra an trede rann e


vez isprizet ez-sistematek koust an armoù-se ha ne oar ket ar gannaded ar pezh zo er budjed votet ganto zoken. Hep kontañ roll al lobiou. Un dra zo boutin d’an holl lodennoù : an diouer a vreud foran war an danvez hag an nebeud a geleier roet d’ar geodedourien. Didalvout, dañjerus evidomp hag evit hon diskennidi, koustus-kenañ hag evit ul lodenn sekret ! Gwir eo ne glever ket kalz tud o c’houlenne vefe ur gwir eskemm demokratel war an danvez-se... Diaes chom hep kaout fiziañs en aozerien al levr. Arabat ankouaat ez eo bet Paul Quilès ministr gall an difenn... Aliañ a ran ar muiañ posupl a dud da lenn *L’illusion nucléaire*. Hetiñ a ran, dreist-holl, e lakao tud a oa a-du gant ar vombezenn peogwir e soñje dezho e oa un droug ret, da welout an traoù gant ur sell nevez.

PETRA NEVEZ ?



Malo BOUËSSEL du BOURG

Kanoù en noz,
gant Langleiz,
Mouladurioù Hor Yezh,
80 pajenn, 10€



Pa voe embannet *Kanoù en noz* evit ar wech kentañ e-barzh *Gwalarn* (niv 39-40) e 1932, ne oa Langleiz nemet 26 vloaz. Oberenn un den yaouank eo neuze. Ha n'eo ket ar skrid-se ken brudet hag e levrioù da zont : *Enez ar rod*, *Tristan hag Izold*, *Romant ar Roue Arzhur*... Un oberenn dave eo bet evelkent, p'he deus bet he zammig levezon war varzhoniezh skrivagnerien

Gwalarn, a c'heller soñjal. Roparz Hemon a oa krog da embann barzhonegoù abaoe pell, gwir eo, met santout a reer ur gerentiezh memestra etre barzhonegoù *Kanoù en noz* ha *Pirc'hirin ar mor* (1929-1933) pe *Ar rozenn du* (1939), ha c'hoazh gant barzhonegoù Maodez Glanndour, e-keñver an doare da reiñ un tres danevellañ d'ar barzhonegoù, pe e-keñver

an temoù dibabet hag an aergelc'h. Un aergelc'h strivha-stourm, teñval ha sakr, ma santer pegen diziraez eo ar pal, forzh peseurt uhelvennad e ve : ar gened hag ar glanded evit Langleiz, ar vro hag ar yezh evit Roparz Hemon ha Maodez Glanndour.. Na pounner ar gefridi ! « Ur feunteunig wenn/E-kreiz ar bed du. »


Labour un den yaouank a lavaren, dre m'eo techet Langleiz da sevel daouadoù re anat o enebiezh moarvat : ar feunteun hag an dezerzh, an noz hag ar skinenn heol, an hunvre hag ar gwir vuhez, an dudi hag an dristidigezh.. Emouez eo ar barzh eus ar pleg-se : « Kollet e oan em yaouankiz, Gant va hunvre leun a zouster, Me 'hunvree, pebezh dihun ! Ar goanag a skoe ouzh va Dor, 'Meus digoret leun a zudi. 'Meus digoret, Tristidigezh ! D'ar wir vuhez ». Romantelezh, gant un elfenn fantastek gwezh-ha-tro, e doare ma c'hellfemp ober gant ar ger “gotek”, gant an dalvoudegezh a vez roet d'ar ger-se bremañ, ken sorc'hennus eo an noz hag ar marv. Tra souezhus a-berzh un den a oa ken hegarat ha ken lirzhin war ar pemdez. Re arouzel eo

barzhonegoù yaouankiz Langleiz evit pakañ « ar gwir vuhez », moarvat. Brav ha fromus ez int koulskoude, gant o haelled prometeek. Ha plijadur zo da gaout ouzh o lenn a vouezh uhel, dre ma paot ar genganez enno. Ar c'hlotennoù-vogalenn, ar c'hlotennoù-kensonenn hag argemmoù al lusk a ziskouez mestroni. Pep a goad-engravet a ya gant ar barzhonegoù. Anavezout a reer doare Langleiz, techet da eeunaat evit kreñvaat an nerzh ezteurel. Diasur eo lod eus an engravadurioù c'hoazh. Oberenn un arzour glas e vegel, met danvez ennañ ken-ha-ken.

E fin an embannadur nevez-se ez eus bet ouzhpennet c'hwec'h barzhoneg troet e galleg. C'hoant en doa Langleiz, diwar atiz e vignon Roperzh ar Mason, da embann un dastumad divyezhek penn-da-benn, met morse ne voe kaset da benn vat ar raktres-se. « Hadet em eus 'kreiz ar gouelec'h, Lec'h ne greske 'met drein ha mein. »

MBdB

**War-zu un islam
adsperedelaet,
etre poell ha naderezh,
gant Ingrid Audoire ha
Jean-Marie Seiget,
Mouladurioù Hor Yezh,
168 pajenn, 10€**



N'eo ket gwall dev levr Ingrid Audoire ha Jean-Marie Seiget, met fonnus an danvez ennañ. Displegañ a reont fraezh meizadoù n'omp ket boas outo. Mont a ra al levr en tu enep d'ar pezh a gred al lodenn vrasañ eus an dud a-zivout an islam. Gwir eo ne vez diskouezet deomp gant ar mediaoù nemet arvezioù ur relijion hengounel sonnet. Strizhder, feulster, estremouriezh, gwalldaolioù, sujidigezh rik, barbarelezh, revelouriezh, kastizoù kriz, n'eo ket gwall hoalus an daolenn.

Diskouez a ra Ingrid Audoire ha Jean-Marie Seiget ez eus un hent all da vezañ muzulman, un hent hag a zo chomet bev abaoe ar penn kentañ daoust dezhañ bezañ bet minorelaet gant an islam hengounel. Lakaat a reont kemm etre ar *C'horan* hag ar *Sunna*. Dastumad komzoù

Mahomed eo ar *Sunna*, sañset. Lakaet e oant bet dre skrid daou c'hant vloaz goude e varv, da-heul tabutoù diniver evit gouzout petra a oa gwir gomzoù ar Profed ha petra ne oa ket. An islam hengounel a chom stag ouzh al lizher pa gav gwell an islam nadel ha poellel tizhout ar speredelezh en tu-hont d'al lezennoù.

Goude bezañ degaset da goun deomp eus orinoù an islam, e tisklêr an aozerien petra a oa prederadennoù diazezerien ar speredelezh islamek, diwar destennoù niverus. Barzhonegoù anezho peurvuiañ. Meur a skol zo. Biskoazh n'eo bet unvan an islam. Deskiñ a reomp, da skouer, en doa bet Ibn Arabi (XII-XIII^{vet} kantved) meur a vaouez da gelennered : Fatima Bint Ibn al-Muthanna, en o zouez, un askezoerez vrudet eus

Andalousia. Redenn ar soufiezha a zegas skridoù hollgaer, ma kenlabour ar gened hag ar garantez oberiant evit tizhout Doue. Un doue hag en em ziskouez en holl voutoù ar bed. Graet e vez gant hollendououriezh (*panenthéisme*), ha neket eus hollzoueouriezh (*panthéisme*) eus ar gredenn-se.

Kinnig a ra Ingrid Audoire ha Jean-Marie Seiget ur

speredelezh orinel ha modern war ar memes tro, diazezet war ur c'hempouez etre poell ha naderezh. Un hent denelour, sinkretek ha doujus, hag a zo, gouez dezho, gwir spered an islam. Gant ma teuio da wir an islam-se...

MBdB

Degemer,
gant Yann-Fañch Jacq,
Keit Vimp Bev,
75 pajenn, 7€



Nolwenn Langoad a zo oc'h ober un Tro-Breizh evit brudañ he levr : *Furnez ar Bobl*. Gant hec'h embanner eo bet aozet troiad ar stal levrioù ha tiez ar retredidi. Mont a ra Nolwenn e darempred gant he lennerien hag he danvez lennerien. Tud kozh peurvuiañ hag a vourz o kontañ kaoz diwar-benn ur bed zo bet... Un tamm pounner e kav-hi an trevell...

Savet eo lodenn gentañ al levr diwar batrom ar romantoù dre lizher. Lenn a reer eskemmoù etre Nolwenn hag hec'h embanner, pe etre Nolwenn hag he lennerien. Dre un heuliad degouezhioù e teuio Nolwenn e darempred gant an dud a ra wardro laz-kanañ iliz Sant-Bernard e Pariz. Freuz ha reuz a oa bet eno er bloavezh 1996 p'o doa kavet repu tud dibaper en iliz.

D'an 23 a viz Eost e oant bet skarzhet gant pemp kant gward-red, bet divarc'het dor an iliz ganto mintin abred. Lod eus ar repuidi o doa kavet bod tro-dro hag hiniennoù zo o doa bet tro da gemer perzh el laz-kanañ. Pedet eo Nolwenn da astenn ar gaoz gant ar ganerien diwar-benn ar c'hantikou hengounel he deus kaset dezho, war zigarez sikour gant distagadur ar poizioù brezhonek. Mont ra da Bariz. Kavout a raio ar garantez e penn un hent gwall skoasellek...


Aze e krog Yann-Fañch Jacq gant eil lodenn e romantig, ha pa vo lavaret, gant dodenn bennañ al levr. Alese an titl : *Degemer*. Penaos degemer tud en dienez hag zifkluk diouzh an druilh ? Penaos degemer tud ha na gomzont ket ar memes yezh, ha n'o deus ket ar memes boaziou, ar memes sevenadur, ar memes kredennoù, ar memes liv ? Petra ober eus an disheñvelder ? Al laz-kanañ a ziskouez bezañ ur skol c'houzañvusted efedus. Kontañ a ra Yann-Fañch Jacq doareoù an dud divroet hag ar re a glask degas un tamm skoazell dezho.

Denelezh, doujañs ha brokusted a vez lakaet war-wel gantañ. Talvoudoù kaer ma 'z

eus. Peadra d'en em soñjal war stad ar bed ha stad hor c'hevredigezh. Petra a c'hell ober pep hini ac'hanomp ? Techet eo an aozer da vezañ eeunik a-wechoù. An dud reuzeudik n'o deus ket ur galon aour war zigarez ez int reuzeudikoc'h eget ar re all. Hag ar re a ra war o zro ne vez ket atav glan-holl o mennadoù. Met gwir eo o deus an dreuztriaded ezhomm bras ac'hanomp, bezet a vezo.

MBdB

Diwar an ero,
 Ul levr ha div bladenn CD,
 Al levr nevez,
 48 pajenn, 19,90€



Un testeni hag ur glad prizius eo dastumad *Diwar an ero*. El levr-pladenn-se ez eus bet tolpet, war div bladenn, danvez seizh pladenn vinil kozh, bet enrollet etre 1949 ha 1967. Gouestlet int holl d'ar c'han-ha-diskan. Treuzskrivet eo bet ar pozioù gant Loeiz Ropars, Gilles Goyat ha Jefic Ropars. An testennoù brezhoneg a zo bet lakaet e galleg gant Loeiz ha Jefic Ropars, gant notennoù puilh. Kinniget eo ar sonioù en div yezh, keñver-ha-keñver, war pajennoù al levr, ken ez eo aes ha plijus selaou ha lenn war ar memes tro, betek intent mat ar c'homzoù. Istorioù a bep seurt a glever, awenet gant ar vuhez pemdeziek war ar maez, ur mare zo bet. Pennadoù kinnig liesseurt a lenner ivez. E deroù hag e fin al levr, met en e greiz kenkoulz all, rak adtapet eo bet ar skridoù a oa bet moulet e tu gin godelligoù kartoñs ar pladennoù. En tu-hont d'an anvioù am eus

meneget c'hoazh, e vo lennet testennoù diwar bluenn Yves Guilcher, Herri Gourmelen, Donatien Laurent ha Bernard de Parades. Pep kanaouenn a zo bet staget outi notennoù distagadur ha reizhskrivadur evit lakaat anat eilstummoù ha berradurioù zo. Ur benveg pedagogel mat da zegas deskamant koulz ha plijadur neuze.

Pa selaouer ar c'hanouennoù e santer ur bed pell oc'h advleuniañ, a-drugarez da labour difaezhus Loeiz Ropars. Heptañ ne vije ket bet eus ar c'han-ha-diskan goude an eil brezel bed, na bremañ c'hoazh, a ouzer a-walc'h. E-touez an ugent mouezh bennak a vez roet da glevet war an div bladenn on bet fromet don gant hini Katrin gozh.


Katrin Gwern, bet ganet e 1874, omp splujet ganti en ur bed all. Hi a ouie « klask an ton » a zispleg deomp Yves

Guilcher, a-raok ma teufe binvioù teknel da reiñ harp d'ar ganerien ha d'ar c'hanerezed en ur soniñ an tonioù. Diskol e oa Katrin gozh, met dizesk ne oa ket. Sevel a rae he sonioù en he fenn, hep tamm kreion na paper. Ar pozioù nemetken. Ha warlerc'h e klaske an ton, pa veze poent kanañ, war an tomm. Treiñ a ra rod an amzer. « N'eo ket ar memes kompagnunez ! »

a estlamme-hi. Gwir a lavar Jefic Ropars : « Diêz-tre d'ar re yaouank gweled pegen don eo an diforh, an troh, an islonk a zo etre ar gevredigez a oa gwechall, hag a helle ober heb sikour ebed deuz an diavêz, hogen ket heb skoazell an dud kenetrezo ». « An hini vije ar berra, egile sikoure, » a gan Katrin gant he c'homer.

MBdB

Marc'heger ar marv,
gant Peter Tremayne,
brezhoneg gant
Jean-Michel Mahe,
An Alarc'h Embannadurioù,
382 bajenn, 14€



Setu ar pempvet levr ma vez kontet enklaskoù ar C'hoar Fidelma e brezhoneg. Ur vignonez eo deuet da vezañ, na pegen dichek ha lorc'hus e ve a-wechoù. Hag ar mignonezed, a ouzer a-walc'h, e vezer plijet ouzh o adkavout. Mall a oa warnon, neuze, o welout ar golo hollgaer kinniget gant embannadurioù *An Alarc'h* : ur marc'h brezel harnezet pinvidik, goullo

e zibr, o c'hortoz difiñv en noz du dall. Promesa ur veaj nevez er Grennamzer hag en Europa.

Ar wech-mañ en em gavomp e trowardroioù abati Bobium, a oa bet savet gant Colomanus (540-615), kenvroad Fidelma. An abati-se eo a oa bet kemeret da batrom adeiladurel gant Umberto Eco pa skrivas *Il nome della Rosa* (Anv ar rozenn). Lec'hiet eo e Norzh Italia, etre

Milano ha Gena. E 664 emamp. Kinnig a ra ar vro bezañ drastet gant brezeliou diabarzh. N'eo ket unanet an tiriad ha gwall zistabil eo an harzoù hervez emglevioù ha dizemglevioù ar pennoù-brezel. Met ezhomm zo da gaout digarezioù evit breze-liñ. Ar c'hoant ober e renkoù war ar bed a oar gwiskañ maskloù hael. « *Notre histoire est noble et tragique comme le masque d'un tyran,* » a gane Apollinaire. Ar relijion a zo bet, hag a zo c'hoazh, unan eus an digarezioù toull-se.


Gant *Marc'heger ar marv* e reer anaoudegezh gant boazioù ha buhezegezh al Lombarded ha gant an enebiezh etre aduidi an ariadegezh hag aduidi kredo sened-meur Nykaea. O klask kadarnaat he c'heleennadurezh edo iliz Roma d'ar mare-se. Ha puilhañ a rae an disivoudoù, da lavaret eo, doareoù all da gompren ha da zegemer kemenadenn an aviel hag ar skriturioù sakr. Aduidi an ariadegezh a nac'he an Dreinded. Ar Mab hag ar Spered Santel n'int ket a-unan gant Doue hervezo, en enep da gelennadurezh Nikea. Kement-se n'eo nemet lien-goueled enklask C'hoar Fidelma, evel-just. Ul lien-goueled

muioç'h politikel eget relijiel, e gwir. Aet eo Fidelma betek abati Bobium evit adwelout he mestr kozh, hag a zo war e dremenven. Amzer en do da fiziout enni un toullad frazennoù kevrinus avat.

Ar veajourien, d'ar c'houlz-se, n'aent ket war-raok gwall vuan. Paz ar c'hezeg a oa ment ar vuhez. Se zo kaoz, moarvat, e krog an danevell war he gorregezh. Ur c'hant pajenn bennak hep muntr ebet, a-boan un taolarnod c'hwitet... N'oan ket boas, ha war-nes bezañ dipitet edon. Met gortoz pell gortoz gwell. Un arridennad muntroù dizispleg a zeu war-lerc'h. Darbar he do Fidelma gant ar muntrer, louarn fin anezhañ. Meur a wech e vo kaset gantañ war roudoù fall. Joa !

MBdB

**Strinkellikat a raent
evel bravigoù,
gant Philip José Farmer,
brezhoneg gant
Ronan an Deroff,
Ar granenn,
28 pajenn, 5€**



Ar wech kentañ eo deomp, din da c'houzout, lenn ur skrid gant Philip José Farmer e brezhoneg. Unan eus skrivagnerien vrudetañ gennad ar skiant faltazi eo. *Strinkellat a raent evel bravigoù* a zo un danevell krizmeurbet. Poaniet em eus un tammig evit dont a-benn da gompren eus petra 'oa kaoz. Da gentañ en abeg d'ar gerioù arnevez a builh en destenn, ken e koller poell an neudenn a-wechoù. Da eil peogwir en em vesk meur a linenn-stur en destenn gant un arz mestrionietkaer. Liveoù skiantel, denel, mojennel, a vez dispaket diwar savboent Jack Crane, anezhañ den yaouank a zo klañv e benn. Pe e c'heller soñjal ez eo klañv e benn, hep ma ve diarvar. Un hurlink a vevomp en e ser, savet diwar batrom ur vetaforenn.

Diouzh un tu, ur wespedenn a spluj he flemm ampoezonet e korf ur viskoulenn kent dozviñ enni. Ur gabared a-feson e vo pa zigloro ar preñved e kof ar viskoulenn, seizhet met bev c'hoazh. Diouzh an tu all, tud iskis a vez o tastum bugale gwan o spered dre ar vro. Ar re-se a zo niverusoc'h-niverusañ war an douar, a-hervez, e-giz ma trofe da foll hor sevenadur. Bac'het e vezont e kampoù ma vo graet war o zro gant medisined a zo stummet o daoulagad evel re ar gwesped, gant un daouzek c'hwec'hkorneg.

Piv int ? Ne ouzer ket mat. Annezidi an douar bet treuzfurmet evit abegoù dianav, alouberien o tont eus ur blanedenn all, pe medisined gwir distummet gant faltazi Jack Crane. Gwelout a reomp ar bed dre e selloù trelatet, met ne dalvez ket e vije

faos ar pezh emañ o soñjal. Ne gompren ket mat ar pezh a zo o c'hoarvezout tro-dro dezhañ. Ur reuziad eo. Chom a ra al lenner en amzivin, paket etre

lost an diaoul ha toull e revr. Tremen hep gouzout eo an nec'husañ. Donemat en ifern, lenner.

MBdB

Mab ar samourai,
gant Géraldine Maincent
ha Daniel Kerleroux
24 fajenn, 5,50€

**Karv-erc'h Tadig
an Nedeleg,**
gant Méli Marlo ha
Pawel Pawlak,
brezhoneg gant
Mark Kerrain
Embannadurioù Sav-heol,
32 bajenn, 6€



Mab ar samourai hag ar menn karv-erc'h a zo bugale leun a startijenn, ha gwad dindan o ivinoù. Pep hini anezho a vo roet e c'hoant dezhañ, met dre un hent dic'horthoz ha na oa ket bet ijinet gant e dud. *Were there is a will there is a way*, a lavar ar Saozon. Ur brav a gentel, ma 'z eus. N'eo ket desevel hor c'herent a ranker seveniñ. Selaou hag heuliañ mouezh hor c'hoantoù don, ne lavaran ket.

Dalc'hmat e vez kinniget d'ar vugale 6-8 vloaz levrioù nevez gant Mark Kerrain.

Levrioù aes da lenn, livet kaer ha dudius. Ar gerioù diaes a vez displeget e fin al levr. Gallout a ra al lennerien mont da selaou an destenn enrollet (ur vouezh hep tamm sonerezh avat) o vont war bajenn katalog *Sav-heol*, war lec'hienn *Kuzul ar brezhoneg*. C'hoarioù a zo bet ouzhpennet e fin *Karv-erc'h Tadig an Nedeleg*, abalamour d'ar vugale ha d'o zud d'ober o mad eus boued an destenn.

MBdB

KELAOUENNOÙ



**Jerom OLIVRY &
Tudual HUON**

gant Xuan Xosé Sánchez Vicente, hag eñ den a lennegezh hag a bolitikerezh.

En e gronikenn *N'eus netra skianteloc'h* ! e kinnig deomp Tangi Legavre un dazont ma vo gwisket hor bugale-vihan gant rochedoù niverel, gwriet gant nanorannigoù, kuit da sant Bartelame bezañ digroc'henet !

El lodenn *Bremañ e Breizh* ez eus kaoz eus teknologiezhioù nevez ivez : ar 5G. Tra m'eo bet daleet, e Brusel da skouer, staliañ stignoù 5G abalamour d'an disfiz ez eus gant tud zo e-keñver ar yec'hed hag an endro, Roazhon, Naoned ha Lannuon a servijo da imbourc'hva en e vent natur.

Er pajennoù *Anavezout ar bed* ez eus kaoz eus Breizh evit

> **Bremañ (425)**

Gouestlet eo teuliad niverenn 425 **Bremañ** da Asturiez. Ha kelt e vefe ar vro-se ? Sed aze ar gudenn a glask Sandrig ar Gall diskoulmañ. Gwir eo n'eus ket a yezh kelt e Asturiez met un darn eus he sevenadur a denn da hini ar broioù kelt, betek an emsavadegoù a zo bet dalc'het du-se. Emsaverien a stourm bepred evit ar yezh hag ar sevenadur, evel ma lenner er pennad-kaoz

ur wech. Ha soñjal a rae deoc'h e oa peñseourien ur skeudenn eus an amzer-dremenet, aet da get pell-pell zo ? Tamm ebet, tudoù keizh ! Ha pa weler kartenn ar peñseoù war aodoù Breizh kinniget er pennad-mañ n'eus ket da vezañ souezhet.

El lodenn *Broioù & pabloù* e lenner ur pennad diwar-benn Bosnia-ha-Herzegovina. An holl a oar e oa bet rannet e div lodenn : Republik serb Bosnia-ha-Herzegovina eus un tu all. Un istor pounner a zo war chouk ar rummad a-vremañ. Ha pa vez kaoz, hiziv an deiz, da rannañ ar Gevread-se e div lodenn c'hoazh en ur grouiñ ur republik nevez e teu en-dro tasmantoù un amzer-dremenet amsklaer.

Ar bleiz a vez komzet diwar e benn er pajennoù *Bremañ e Breizh*. Warlene e oa bet embannet gant Arsella ar Bleizi e vefe bet gwelet ur bleiz kostez Lenn Gwerledan. Abaoe ez eus bet furchadegoù met roud ebet anezhañ. Tud ar vro, koulskoude, eo deuet en-dro anv Gwilhoù war o zeod...

El lodenn *Bevañ e Breizh* e lenner ur pennad-kaoz fonnus gant Yann Rivallain, eil pennskridaozer ar gazetenn nevez *Le*

journal de la Bretagne a zo bet embannet he niverenn gentañ e miz Ebrel 2019 [siwazh e ouzer hiziv eo chomet a-sav ar gaze-tenn goude an niverenn 9, d'an 12 a viz Even].

Nevez zo e oa bet advouezhiet ar film mil vrudet *Terminator 2* gant *Dizale*. Anavezet mat eo bremañ ar gevredigezh a ra war-dro an advouezhiañ e brezhoneg. Met ar pennad a lenner el lodenn *Bevañ e brezhoneg* a ziskouez deomp pegen start e c'hall bezañ kinnig traoù nevez... e brezhoneg zoken !

Er pajennoù *Levrioù, arzoù, embann* e kaver un dibab fonnus ha liesseurt eus ar pezh a zo bet embannet e Breizh nevez zo. Pep hini a gavo e lod !

Al lodenn *Sportoù & yec'hed* a zo ar wech-mañ troet war ar c'helenn. Penaos kreñvaat ho kigennoù en un doare efedus ha padus ? Sed ar pezh a ginnig deoc'h ober Stefan Carpentier.

Peadra da dañva ar rekipeoù kinniget e fin an niverenn divorc'hed da vat !

JO

> **Al lanv (147)**



Meur a varzhoneg a c'heller lenn en niverenn-mañ el lodenn lennegezh : *Tiriadoù an digasted* gant Anna Canevet, *Kroashen-toù-tro* ha *bered-veur an Esperañs* gant Youenn Kervalan, *Gwerz ar Reuzeudien* gant Sulio Laouenan, *Dindan ar memes heol...* gant Yulia Borisova. Ar c'hog raden hag ar verienenna zo ur marvailh bet skrivet gant Ervoan ar C'hereg, Skignet e oa bet war ur follenn distag. Ur skrid all : *Prosez bras etre ki ha kazh* a zo bet kavet war niverenn 8 *Arvorig*, miz Eost 1925, sinet X.

Seizh levr a zo bet burutellet ha barnet gant Alan Botrel

(*Dastumadeg an Anaon* gant Bernez Tangi, *Gevred ha skridoù diechu all* gant Roparz Hemon, *War-zu un islam adesperedelaet* gant Ingrid Audoire ha Jean Marie Seiget, *Ouzh skleur an noz* gant Jerom Olivry, *An diwaller er segaleg* gant J. D. Salinger, *Kan ar Mor-Bihan, Le chant du Morbihan* gant Alain Durel hag *Istorioù Maouezed* gant Guy de Maupassant).

Div bajenn a zo gouestlet d'an dudi : gerioù-kroaz Job, ur miltamm evit dizoleiñ ur c'hrennlavar, a c'her da c'her.

El lodenn *Kevredigezh* ez eus pennadoù liesseurt : Sone-rezh hengounel ha sonerezh aozet, dibriediñ e brezhoneg, gwad ar bouzelloù-du, memor ha dielloù.

Kendelc'her a ra Charlie Grall gant e studiadenn diwarbenn daou zen a bouez er C'hastell-Nevez : Remont Delaporte ha Reun ar C'halan.

El lodenn etrebroadel ez eus kaoz eus ar *Brexit* ha kudenn Bro-Iwerzhon, Gwirioù an hen-vroidi.

TH

> **Le peuple breton**
(664)



Ar pennad kentañ e brezhoneg a c’heller lenn er gelaouenn **Le Peuple Breton/Pobl Vreizh** niv. 664 (miz Mae) a zo bet skrivet gant Paol ar Meur. Kaoz a zo gantañ eus stourm ar Rochedoù Melen, « stourm un trede stad a-enep an uhelidi ». War meur a dachenn ez eus bet fiziet en dud kefredioù hiniennel ha gant-se ez eo kalz startoc’h kaout kenskoazell, n’eus skipailh labour ebet ken. An taos war an trelosk a oa bet pennabeg ar manifestadegoù kentañ. « Luskad an dud ne c’hellont ket bevañ hep o c’harr-tan eo

hini ar Rochedoù Melen dreist-holl, » eme P. ar Meur.

Nevez zo ez eus bet embannet ul levr dindan renerezh Jean-Michel Léger ha Béatrice Mariolle anvet : *Densifier/ Dédensifier, penser les campagnes urbaines*. Savboentoù disheñvel a zo el levr, « un dastumad mennozhioù eo kentoc’h eget ur preder unvan, » eme Nil Caoussin. Daoust hag e ranker bevenniñ strizh diorren ar c’hêrioù evel ma ra ar Saozon ? N’eus nemet er c’harterioù paour ma vez kresket stankder ar savadurioù, ar re binvidik a chom e karterioù distank ha plijus.

Penaos gwareziñ ar maezioù pa ouezer e kresk spontus ar c’hêrioù ken eo goloet an douar gant betoñs ha distrujet an natur ?

Gwenn Menez a laka ar gaoz war ar sacher evezh Julian Assange, ar siber-stourmer a oa bet harzet e miz Ebrel gant ar polis saoz.

Robert Neal Baxter a oa bet betek Bro-Iwerzhon nevez zo ha sachet eo bet e evezh gant meur a lec’h arouezius-meurbet en Iwerzhon : ar c’harc’har e Dulenn ma oa bet fuzuilhet ar vrogarourien bet embannet ganto *Skrid embann ar Republik* e 1916. Doire (Derry) eo ar gêr eo bet fromet ar muiañ

ganti, lec'h ar sulvezh Wadek (*Bloody Sunday*). Karen Bradley, ministrez evit Norzhiwerzhon he doa disklêriet er parlamant ne oa bet lazhadeg ebet, an arme hag ar polis o doa graet ar pezh a oa dleet dezho ober en un doare dereat.

Lenn a c'heller ivez ur rentañ-kont eus niverenn 433 *Al Liamm* ha tri levr a zo bet

burutellet gant Herve Lannuzel : *Istorioù maouezed* gant Guy de Maupassant troet e brezhoneg gant Mark Kerrain (embannet gant *Sav-Heol*) ; *Penaos dont da vezañ brezhoneger a-vihanik* gant Erwan Hupel (embannet gant *Al Liamm*) ha *Beaj vat* gant Yann-Fañch Jacq (embannet gant *Keit vimp bev*).

TH

> Bro Nevez (150)



War golo **Bro Nevez** ez eus ur poltred eus bugale skol Diwan Landerne. Lois Kuter eo maeronez ar skol ha 33 bloaz zo e oa bet krouet hag ouzhpenn-se eo emgavet **Bro Nevez** gant an niverenn 150. Roet e oa bet lañs d'ar c'hannadig e 1981 hag ar pal a oa difenn ar brezhoneg :

« *it is the breton language that is the focus of our work* » ha ne c'heller nemet reiñ meuleudi ha gourc'hemenoù d'an dud-se hag a zo pell mat ouzh Breizh hag a zalc'h da gelaouiñ an dud eus ar pezh a c'hoarvez e Breizh hag e Bro-C'hall. Bloavezh ar yezhoù henvroad a oa diviz an *Unesco* ar bloaz-mañ hag ar pennadoù da heul a denn d'an afer-se : *Is Breton an indigenous language ? - Are Bretons an indigenous people ?* Daoust ha lakaet e vo ar brezhoneg da yezh henvroad ha ni da-heul ?

Meur a bennad a zo gouestlet d'an dud aet da Anaon : Yann-Fañch Kemener, Annaig Baillard Gwernig ha Fañch Morvannou.

Evel kustum ez eus bet graet ur renabl eus ar pladennoù nevez-deuet er-maez e Breizh.

TH



**Annaig KERVELLA &
Herve LATIMIER**

HOR MIGNONED

Ganedigezh :

Laouen bras eo Milio Latimier-Kervella ha Cécile Morvan o reiñ deoc'h da c'houzout eo bet ganet o mab Kirio d'ar 26 a viz Ebrel e Sant-Brieg.

Kañv :



Aet eo Fañch Morvannou da Anaon d'ar 6 a viz Mae 2019 e Brest. Ganet 'oa bet d'an 20 a viz Du 1931 er C'hloastr-Pleiben ma vevas e vugaleaj. Goude bezañ kuitaet ar vro e-pad ur pennad e tistroas da Goloreg goude marv e dad. Ober a reas e studioù er c'hloerdi evel kalz paotred eus familhoù paour ha kristen.

Agregad war al Lizhiri Klasel 'oa ha dont a reas da vezañ doktor war ar yezhoù keltiek e 1988. *Aspects de la littérature bretonne vannetaise dans la première moitié du XIX^e siècle* zo titl e dezenn.

Kelennet en deus latin ha brezhoneg da c'houde e Skol-veur Breizh-Izel e Brest. Skrivet en deus kalz, studiadennoù dreist-holl. Stourmer e oa ivez.

Brezhoneger ampart ez eo brudet evit bezañ aozet kentañ hentenn brezhonek *Assimil* (1975-1979) ha bezañ kinniget un doare skrivañ disheñvel diouzh an daou zoare implijet d'ar c'houlz-se (KLTG ha doare an aotrou Chaloni Falc'hun) evit ar brezhoneg.

Ezel e voe eus UDB. Rener ar gelaouenn *Pobl Vreizh* eo bet etre miz Mezheven 1976 ha miz Mae 1982 ma paouezas *Pobl Vreizh* da vezañ embannet evel kelaouenn distag. D'ar mare-se e skrivas *Le Breton, la jeunesse d'une vieille langue* embannet gant *Les presses populaires de Bretagne* (ti-embann UDB) e 1980 hag advoullet e 1988, ha 1994.

Stourm a rae er gevredigezh *Ar Falz-Skol Vreizh* ha trede rener ar gelaouenn *Planedenn* e voe.

Skrivet en deus e kalz kelaouennoù, *Al Liamm* en o zouez. Kavout a reer 15 pennad sinet Yann Glevareg etre an niverenn 177 (Gouere-Eost 1976) hag an niverenn 296 (Mae-Eost 1996) war lec'hienn *Al Liamm*.

Den gouiziek-kaer war ar brezhoneg e oa ur c'hristen gredus ivez. Skrivet en deus diwar-benn tud a iliz vrudet evel Mikael an Nobletz hag an Tad Maner hag evit ar c'han relijiel (*Kanennoù ar feiz*, embannet e 2000). Ezel eus ar *comision etreeskoptiel troidigezh testennoù al liderezh* eo bet etre 1999 ha 2004 ha kenurzhier komision *yez ha sevenadur* eskopti Kemper ha Leon etre 1999 ha 2010. Graet eo bet marc'heg Urzh Sant Gregor Veur gant ar Pab Frañsez e 2013 evit e labour.

Kollet hon eus gantañ ur brezhoneger eus ar c'hentañ hag ur stourmer a dalvoudegezh.

Kas a ra skipailh *Al Liamm* e c'hourc'hemennoù a gengañv d'e familh ha d'e vignoned.

Ra vo skañv douar Breizh evitañ.

Gwilhmed Fravallo, gwreg hor c'houmananter feal Max ar Fur (†) ha mamm hor c'houmananterien Gweltaz hag Iwan ar Fur a zo aet da Anaon d'al Lun 1^{añ} a viz Ebrel en he zi, en Arvor. Sebeliet eo bet d'ar Gwener 5 e bered ar C'horpont e Lannarster.

PROFOÙ

Miz Meurzh : Iwan AR FUR ; Dr Yves GOURVES ; Jacques GUEGUEN ; Jan-Mañ ha Mañ-Gristin GWERNHALEG ; Marie-José ALANOT ; Pol Yvon VIROT ; Jacques VINCENT ; Maryvonne CUDENNEC ; Paol AR MEUR ; Paskal TABUTEAU

— War un dro : 180€

Miz Ebrel : Francis GOHIN ; Paskal HERVIO ; Yann-Fañch KERNEIS

— War un dro : 50€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

CANTO E CONTRACANTO

Sed titl ul levr e galiseg diwar-benn barzhoniezh Breizh. María Lopo a anavez hor bro. E Skol-veur Roazhon 2 he deus bet kaset enklaskoù, ur studiadenn he deus bet savet diwar-benn ar barzh Guillevic da skouer.

El levr-mañ e kaver un dibab eus barzhoniezh Breizh eus an XX^{vet} kantved, en galleg ha brezhoneg. Estreget un arroudenn bet savet gant Ivonet Omnes er XIV^{vet} kantved.

Evit pezh a sell ar brezhoneg ez a an dibab eus Añjela Duval da Nolwenn Korbell hag etrezo e lenner barzhonegoù gant Per Denez, Naig Rozmor, Youenn Gwernig, Glenmor, Paol Keineg, Bernez Tangi, Gwendal Denez, Alan Botrel.

Keñver-ha-keñver emañ an destenn orin hag an droidigezh e galiseg. E penn kentañ al levr ez eus ur pennad berr gant Valentín García Gómez, sekretour ar politikerezh yezh. Ur raskrid gant María Lopo a zispleg petra eo barzhoniezh ha lennegezh Breizh, menegiñ a ra un toullad skouerioù ha troourien.

Talvoudus eo gouzout e vez klasket kinnig ar pezh a vez savet e yezhoù minorelaet gant broioù o deus da stourm evit o yezhoù.

Canto e contracanto – Antoloxía de poetas e Bretaña, gant María Lopo, embannet gant *Xunta de Galicia*, 2019, 197p.

KANN AL LOAR

D'ar Sadorn 6 a viz Gouere e Liorzhòu ar Palud e Landerne, da 6 eur d'abardaez, e vo kinniget « Levrioù digor-kalon » e-kerzh Gouelioù Kann al Loar. Pedet e vo 3 skrivagner : Goulc'han Kervella evit *Distro Jarl eus ar brezel*, Erwan Hupel evit *Penaos dont da vezañ brezhoneger a-vihanik* ha Jerom Olivry evit *Ouzh skleur an noz*.

CHAKOD NOZ 2019

D'ar Sadorn 11 a viz Mae e oa bet dalc'het trede abadenn *Chakod Noz* e Douarnenez. Ur c'hant bennak a dud a oa bodet da sellet ouzh 18 filmig berr ha da vouezhiañ evit ar re a blijas dezho ar muiañ. Un dodenn a oa da heuliañ ha da vezañ filmet gant ur benveg bihan a c'hell mont en ur chakod. « Pemp troad d'ar maout » sed a oa dodenn ar bloaz-mañ.

Kalz skolajidi ha liseidi a gemer perzh er genstrivadeg. Digor eo d'an holl, kavet e vez neuze tud a vicher pe get.

45 film a oa bet kaset ar bloaz-mañ. 18 a oa bet rakdibabet. Meur a rann a zo bet savet evit priziañ ar filmoùigoù sevenet e brezhoneg hag is-titlet e galleg. Setu an disoc'hoù :

- Priz Moutig : *Bleiz* - ur strollad eus Landerne

- Priz Fentus : *Savadourien an dibenn* - liseidi Lise Brizeux e Kemper

- Priz Brezhoneg : *Troioù-lavar evit ar re nul* - L'Atelier – Taol Kurun Kemperle

- Priz Dodenn (an tostañ eus an danvez kinniget) : *Ar vi hag ar yar* - Skolajidi Diwan Kemper
- Priz ar Sardinenn Aour : *Jibouez* - Morzhol Prod.

REDADEG 2020

Eus ar 15 d'an 23 a viz Mae 2020 e raio *Ar Redadeg* tro hentoù Breizh. « Deus 'ta mignon ! » eo an dodenn bet dibabet. Setu ar c'hinnig : « E 2020, 'tap krog 'ba' dorn ur mignon, ur vignonez, ha n'en/he deus ket kemeret perzh er Redadeg gwech ebet, ha deus da redek gantañ/ganti. Seul vuioe'h a dud war an hentoù, seul vuioe'h a blijadur ».

Loc'hañ a raio eus Karaez hag echuiñ e Gwengamp.

Bezit prest da redek betek an trec'h.

www.ar-redadeg.bzh

KOMZOÙ DIBOELL

Strafulh ha reuz en deus ministr gall an deskadurezh, an aotrou Blanquer, silet ha plantet er vro e miz Mae. E Breizh da gentañ met ivez er broioù all e Frañs, lec'h ma vez hentennoù dre soubidigezh kinniget er skolioù. Perak bezañ faeus ha tagus evel-se ? Pegeit e pado seurt dismegañs ha digompren ? Abaoe 50 vloaz e ranker dizehan bezañ war an dachenn o tisplegañ, kinnig, brudañ, kas war-raok, skoazellañ, dibunañ, stourm, sevel ha mil ha kant ober all a ranker kas da benn ouzhpenn evit lakaat e pleustr al liesyezhegezh. Ur gwir diazez eo kement yezh a zo evit kement boud-den. Mantrus eo bevañ seurt darvoud er XXI^{vet} kantved, e bro Gwirioù Mab-den, sañset !

Lañset eo bet un arc'hantaouiñ a-stroll evit sevel ur bladenn hag ul levr. Kanet e vo ar c'hanaouennoù gant ar vugale, ha sonet gant o zud. Un tem a vo kavet, hini « al lastez hag an endro ».

Peadra da ziskouez nerzh ar skolioù Diwan, ha plas ar stourm evit an Douar evit ar vrezhonegerien.

Evit reiñ un tamm sikour dezhe:

www.leetchi.com/c/diawangwengamp